


HEKLEV SEVENADUREL

	A-dreuz lenn	2
	Petra nevez ?	8
	Kelaouennoù	21
	Notennoù	26

Herve LATIMIER

Vilaine blessure,
gant Frank Darcel,
Le Temps Éditeur, 2019,
584 fajenn, 19€



Ral eo lenn ul levr polis a 584 fajenn. Ha koulskoude... Bet en deus bet levr Frank Darcel priz ar romant roet gant Kêr Garaez e 2019. Dellezek eo. Lennet e vez buan abalamour d'un istor (pe da veur a hini) luziet ha dedennus war un dro.

Gwelet e vez ez eo diazezet ar romant war enklaskoù resis war doareoù ar polis hag ar justis

e Frañs met ivez war ur bern tachennoù all. Anavezout mat a ra an aozer Kêr Roazhon hag an trowardroioù. Plijus-kaer eo evit al lenner a anavez un tamm ar gêr.

N'eo ket hep abeg em eus meneget meur a istor. Heuliañ a reer un toullad tudennoù e gwirionez gant istorioù a seblant distag. Tamm-ha-tamm e kaver

liammoù etrezo. Betek fin ar romant pe dost. Kinnig a ra an dudenn bennañ un deorienn a glot mat gant framm ar romant p.550 : ar sinkonekelezh. Un darvoud a c'hell bezañ e-kreiz ur bern darvoudoù all aozet evel ma vije bet an hini kentañ pal an holl.

An tudennoù zo taolennet mat. Dedennus-kenañ eo an dudenn bennañ, al letanantez Laure Jouan gant he frailhoù, he c'hudennoù, he doareoù personel da ren an enklask a-zivout marv ur c'hrennard en unan eus karterioù

cheuc'hañ Roazhon. Kalonek, speredek, gouestlet d'he labour met trubuilhet don eo.

Skrivet mat eo al levr. N'enaouer morse. Luziet hep bezañ re eo an istor(ioù). Divarrek e vefen d'ober un diverrañ. Sot e vefe en ober evit seurt romant forzh penaos. Un diskoulm nemetken : lennit anezhañ. Hep kaout aon da gavout war ho hent rev ha feulster, an daou asambles alies ha tudennoù un tamm digempouez pe digempouez da vat...

**Rennes saturée ? Une
croissance à partager,
gant Nil Caoussin,
Presses Populaires de
Bretagne, 2019,
116 pajenn, 12€**



Un arnod-skrid eo an oberenn-mañ. Lennet e vez aes peogwir eo skrivet sklaer hag en un doare plijus. Gwelet 'vez e oar an aozer petra eo ar bedagogiezh. Ur bern daveoù ha sifroù resis a gaver el levr hep bezañ enoeüs pe troc'hañ red al lenn. Ouzhpenn rakskrid Daniel Cueff, ar pennad

diwezhañ, *Retour à Rennes*, ha pennad Louise Blin, ezel eus Mignoned glad Roazhon, ez eus teir lodenn el levr.

Al lodenn verr gentañ zo evel un digoradur. Termenet e vez enni un nebeud traoù a sikour da gompren gwelloc'h al lodennoù all. Dedennet on bet gant an

diforc'h graet gant Nil etre “degemer” ha “dedennañ” evit ur gêr. Roazhon prest da zegemer tud ha Roazhon o klask dedennañ ar muiañ posupl a annezidi n'eo ket memes tra...

An div lodenn hirañ, « *Les conséquences de la croissance de la métropole rennaise : la vie quotidienne, environnement, équilibres territoriaux* » ha « *La croissance, pour quoi faire ?* » a gloka an eil eben.

An hini gentañ a zispleg mat penaos o deus dibabet dilennidi meurgêr Roazhon e-touez pemp senario bet kinniget dezho evit an dazont, ar pevare anvet « *Polarisation et renforcement des contrastes* ». Kresk ar veurgêr diwar goust peurrest Breizh. Gwelet e vez goude perzhioù fall seurt dibab evit annezidi ar veurgêr o-unan. Diaesoc'h-diaesañ e vo mont ha dont evit ar re n'emaint ket o chom e kreiz-kêr : stouvadegoù e-leizh, koll amzer ha saotradur. Priz al lojeiz o kreskiñ e kreiz-kêr hag o kas pelloc'h-pellañ an dud a renk etre. Sevel tiez uheloc'h-uhelañ a implij kalz a zanvezioù a zeu da vezañ ral (traezh da skouer) hag e-lec'h krouiñ “enezouigoù” freskder e krouer “enezouigoù” tommder pa ouzer e vez kalz

tommoc'h en ur gêr vras eget war ar maez er prantadoù tomm a anavezet bremañ. Kollet e vez tachenoù glas. Riskl a zo, zoken, da lakaat en arvar ar gouriz glas a zo etre kreiz-kêr ha kumunioù ar c'hentañ kelc'h. Difetet e vez ar gêr ha lakaet en arvar he glad a blij kement d'he annezidi a-vremañ hag a zedenn re nevez... Ha kalzik traoù all. Gellout a reer ouzhpennañ abaoe miz Meurzh 2020 ez eo ar c'hêrioù bras un dachenn a-feson evit ar c'hleñvedoù-red d'en em ledañ...

En eil lodenn e kuitaer Roazhon evit plediñ gant an ideologiezh a laka de grediñ emañ dazont Mab-den e meurgêrioù brasoc'h-brasañ. Diskouez a ra Nil penaos e saver teoriennoù “poellek” war ziaezoù faos dispennet gant meur a skiantour.

Ha tu zo da ijinañ ne glaskfe ket c'hoari ar jeu-se evit mont war-du un diorroadur kengret eus Breizh ? Ya, evel-just, met poent bras eo cheñch hent...

Ul levr da lenn evit magañ preder pep hini.

**Jésus, l'homme qui
préférait les femmes,**
gant Christine Pedotti,
Albin Michel, 2019,
188 pajenn, 17,50€



Souezhet brav on bet gant *Jésus, l'homme qui préférait les femmes*. Skrivet eo en un doare plijus-kenañ. Ur yezh eeun daoust d'ar ouiziegezh diskouezet gant an oberourez. Dreist eo an doare ma kont ar senennoù tennet diouzh an Avieloù a zibab evit reiñ un diazez kreñv d'he mennozhioù. Gwir senennoù film. Ar re o deus skrivet an testennoù-se tost da zaou vil bloaz a ouie kontañ an traoù, anat deoc'h. Merzhet em eus gant plijadur e lenne an aozerez un toullad testennoù evel ma lennen anezho. Yann 8, 1-11 « Ar wreg avoultrerez », da skouer. Kinnig a ra Christine Pedotti ur sell nevez war ur bern testennoù a seblante anavezet mat. Gwir eo e vezont studiet ha displeget gant paotred nemetken abaoe penn kentañ an Iliz daoust ma 'z eus bet, war a seblant,

ur prantad un tamm reishoc'h e-keñver ar merc'hed e penn kentañ tout. Trec'h eo bet buan a-walc'h an hengoun tadveliel yuzev, gresian ha roman war gelennadurezh ar C'hrist. Padout a ra ar sell-se c'hoazh, siwazh. Dek chabistr a gaver el lev'r, ur ger-digeriñ hag ur c'hlozadur mui ur stagadenn dedennus-kenañ diwar-benn emzalc'h an Iliz katolik e-keñver belegiezh ar merc'hed.

Pep chabistr a bled gant un dodenn liammet ouzh emzalc'h Jezuz e-keñver ar merc'hed en diavaez eus ur chabistr war plas Mari er skriturioù. Bep tro e tiazet Christine Pedotti he freder war pennadoù resis eus an Aviel. Bep tro e vez meneget endro sokial mare Jezuz, war plas ar merc'hed peurgetket.

Diskouez a ra mat an aozerez e yae Jezuz a-enep doareoù e

vare. Un diaroger e oa. Spontus eo e vefe bet lezet a-gostez pe mouget zoken al lodenn-se eus e gelennadurezh e-pad kantvedoù. Ha re wan eo

c’hoazh ar spi da welet an traoù o cheñch.

N’eus ket ezhomm da vezañ kristen evit lenn al levr-se gant dudi, er c’hontrol.

**Le New Deal Vert
Mondial, Pourquoi la
civilisation fossile va
s’effondrer d’ici 2028,
Le plan économique
pour sauver la vie sur
terre,**
gant Jeremy Rifkin,
Les Liens qui
Libèrent (LLL), 2019,
304 fajenn, 21,80€



An titl a c’hellfe lakaat da soñjal emañ Rifkin e-touez an “disac’houriezhonourion” (*collapsologists*, e saozneg) met n’eo na faoz penn-da-benn na gwir penn-da-benn.

An diforc’h bras eo e soñj dezhañ e c’heller mirout ouzh ar gwashañ da c’hoarvezout en ur implijout teknikoù hag aozadurioù ar bed a-vremañ (embregerzhioù, stadoù ha strollegezhioù, tiez-bank, sindikadoù...) evit lakaat ar gevredigezh da gemm ha n’eo ket dre un dispac’h. Alies e kavan ez eo kalz re wellweler o verzout kemmoù don lec’h n’on ket sur tamm ebet e vefe. Met n’eo ket

evit se ez eo didalvoud e breder, pell ac’hane. Ma soñj deomp ez eo tremen poent ober un dra bennak evit stourm ouzh kemm an hin, ez eo gwelloc’h bodañ nerzhioù an holl a fell dezho ober en un doare pragmatek daoust d’ar selloù ideologel disheñvel.

Kavout a reer un digoradur ha div lodenn el levr. Kalz notennoù e fin an oberenn ivez. Pevar chabistr al lodenn gentañ, « *La grande disruption : l’abandon des combustibles fossiles et le problème des actifs bloqués* » a zo kentoc’h deskri-vadur stad an traoù. Diazezet eo e breder war pouez an dan-

frammoù evit ur gevredigezh (binvioù kehentiñ, mammennoù energiezh ha doare da vont ha dont). O vevañ an trede revelzi greantel e vezer goude hini ar glaou, ar vurezh hag an tren hag an eil, hini ar petrol marc'hadmat, ar pellgomz, ar skingomz hag ar skinwel, an tredan hag an hentoù bras... An teknikoù nevez ha kemmoù an hin a cheñch an traoù war kalz tachennoù. Kregiñ a ra ar gevredigezh da vezañ aozet evel ur rouedad ha n'eo ket ur biramidenn hag ar c'henlabour ha n'eo ket ar c'hevezerezh...

An eil lodenn, « *Le New Deal vert renaîtra de ses centres* » a bled gant an nerzhioù a roio tro d'ar bed kemm : « *Réveiller le géant : le pouvoir des fonds de pension* » hag « *Une transformation économique : le nouveau capitalisme social* ». El lodenn-se ez eus kalz hentoù dedennus met marteze un tamm re vrav... Bet on bet un tamm divarc'het gant e zielfennadur a-zivout natur ar “fontoù retred” a zlefe bezañ meret gant ar c'hopriddi o deus krouet anezho ha n'eo ket gant merourien gant ur sell frankizour war an ekonomiezh. Digreizennañ ha kenlabour ur sell kevreadelour

war aozadur ar bed. Diaes deomp bezañ a-enep. Bet on bet plijet gant ar sell en deus war roll an arme...

Unan eus e balioù eo dihuniñ ar Stadoù-Unanet war an dachenn. Setu perak ez eo ken gwellweler marteze...

Forzh penaos, daoust d'ar gwanderioù bet memeget a-us e tleer delc'her kont eus e sell hag e ginnigoù ma fell deomp labourat asambles evit « save-teiñ ar vuhez war an douar » evel ma lâre er chabistr diwezhañ.


Un evezhiadenn a-raok klozañ : skrivet eo bet al levr a-raok kleñved-red ar c'hovid 19 evel-just. Diaes eo gouzout hag-eñ e lâre an traoù e memes stumm bremañ...

PETRA NEVEZ ?



**Magali BARON,
Herve LATIMIER,
Emmanuel PASTORI &
Malo BOUËSSEL du BOURG**

Rampo,
gant Loeiza an Duigou,
Al liamm,
50 pajenn, 6€



Kregiñ a ra al levr dindan stumm un deizlevr. Al lenner a ra anaoudegezh gant Lizaig, harozez an istor. O paouez gwilioudiñ emañ he mamm, hag ezhomm da ziskuizhañ he deus. Neuze e vo kaset ar grennardez da dremen ur sizhunvezh e ti he zud-kozh er Gerveur.

Siwazh dezhi emañ amañ ivez he c'henderv, Jean-Elouan, ken torr-penn ha gouiziek.

Kerkent hag erruet er Gerveur e vo desachet hec'h evezh gant ur maner dirapar...

Dindan daoulagad al lenner e vo kontet un istor o liammañ

istor ar vro, ar mojennoù, ar gwerzioù...

Kavout a reer ennañ ivez un teñzor hag un tasmant e-kreiz an istor.

Ne vez ket heuget al lenner gant ar geusturenn koulskoude, ar c'hontrol-mik an hini eo.

Plijadur am eus bet o lenn an danevell-mañ skrivet en un doare nerzhus, gant fent ha mousfent.

**Ar c'hlasker-aour ha
danevelloù all,
gant Loeiz Gwilhou,
Embannadurioù Al Lanv,
284 fajenn, 14€**


Adperc'hennet en deus Loeiz Gwilhou e yezh vamm a-benn ober ur benveg krouiñ anezhi. *Ar c'hlasker-aour ha danevelloù all* en deus skrivet evit e blijadur, sur a-walc'h, met evit testeniañ ha lakaat boutin kenkoulz all. Ar pemzek danevell a ya d'ober e zastumad kentañ a oa bet skrivet etre 2008 ha 2019, diwar darvoudoù gwir pe wirheñvel. Er gazetenn *Ya !* pe *Al Lanv* int bet embannet c'hoazh. Eus ar c'hantved tremenet ez eus anv,

Ul levr evit ar re yaouank eo, met gallout a ra bezañ lennet gant an holl.

Fin an istor a zo dic'hortoz a-walc'h. Daoust hag-eñ e vo c'hoazh deus troioù-kaer Lizaig ?

Emichañs e vo, peogwir eo plijus an harozez yaouank, ha dornet-mat ar skrivagnerez.

EP




kostez ar C'hab : aber Gwaien, Ploeneg, Pontekroaz, hag un tamm mat pelloc'h gwech ha gwech all, pa vez ret d'unan divroañ da Bariz, war-lerc'h e vara... Taolennoù sokial eus un amzer zo bet neuze, ha n'int ket na dizudi na disaour, daoust ma n'eus ket anezho pennoberennoù lennegel. Enno e santer perzhioù mat ar "gwir Vretoned" : goût a ouzont kontañ, ha kontañ gwir, gant un tamm fent ha gant kalz a gizidigezh, e doare ma vezet

fromet ha pa vefe eeunek pe eeunekoc'h an doare da gas an istor. Denelouriezh, sed ar ger a zeu war va spered pa lennan danevelloù Loeiz Gwilhoù : ar vuhez kriz, ar c'harantezioù yaouankiz, an henvelreviadelezh, an divroañ hag ar gastaouerezh, lazhadeg veur ar c'hentañ

brezel bed, ar vignoniezh. Ur mennozh mat eo bezañ lakaet « Ar C'hlasker-aour » da ditl an dastumad. An istor farsusañ eo, ma vez graet goap ouzh karan-tez divoder Mab-den evit an arc'hant. N'eo ket ar furnez enebourez ar fent !

MbdB

Ar vuhez diamzeriet,
gant Yann Guillamot,
Al Liamm,
132 bajenn, 15€



Sed aze deuet er-maez eil levrenn kontadennoù Yann Guillamot, a zalc'h gant e labour dastum ha skrivañ istorioù kle-vet a-hed e vuhez, adalek an oad tenerañ. Dont a ra a-bell neuze ar c'hontadennoù-se, ac'h a d'ober teñzor eñvorennoù ur paotr bet maget a-viskoazh gant « rimoù ha rimadelloù, breganoù ha divinadelloù ». Al levr kentañ, *Straed ar sec'hedien*, a zastume istorioù farsus. An dastumad-mañ a ginnig 14 marvailh a laka da vont tre en ur bed marzhus, ma vez al loened o

rannañ kaoz gant an dud, ma 'n em gaver ingal gant an Diaoul, sant Pêr pe an Ankoù. Dre c'halloud ar gaoz e vez digoret ur gwir vuhez diamzeriet, evel er gontadenn ma vez pedet ar c'houer e palez dindan zouar ar Gorriganed ; bamet eo gant kement a ec'honder hag a sklêrijenn, n'en dije ket gallet empentiñ a-ziagent ; ha pa zistro d'ar gêr ez eus tremenet kant vloaz, hag e vez disrannet diouzh e re nesañ gant ur strobinnell didrec'hus... E-giz-se e vez bevet ivez e bed ar

c'hontadennoù : dalc'het e vezer gant ar skeudennoù, gant hentad an danevell, gant dor ar formulennoù a zigor hag a gloz ar gomz, gant al lec'hioù hud : mougev an Diaoul, ar bed din-dan zouar, ar menez ma vev al labous-aour.

Ul labour skiantel a zo bet graet ivez tro-dro d'an hengoun, peogwir eo renket pep kontadenn hervez tipologiezh *Aarne-Thompson-Uther*. Ar rummata-dur-se, a oa bet savet e stumm kentañ e 1910 gant ar Finlandad Antti Aarne, a glask renabliñ en un doare poellek ar c'hontadennoù hengounel, hervez o steuñvenn ; lakaat a ra war-wel ez eus stummoù a vez adkavet dre ar bed-holl, da skouer hini an nerzh gennet gant ar gwidre, pe hini ar gevrat gant an Diaoul. Kavet e vez danevelloù deskoni, evel hini an tri breur o vont da c'hounit o bara dre ar bed bras, an hini yaouankañ o trec'hiñ war gement skoilh a-drugarez d'e vadelezh ha d'e vrokusted ; istorioù ankenius, evel hini ar prof dañjerus roet d'ar c'houer gant ar boudiged ; unan ivez d'ober goap ouzh un den sot ha droch. An dodenn avat a vez kavet an aliesañ er c'hontadennoù-se eo hini an Diaoul

yennet ; ken kreñv e oa bezañs an Diaoul e buhez an dud ken o doa ezhomm d'ober al lu outañ, ha da grouiñ un dudenn a zo lamet digantañ pep pouez relijiel.

Dre voneur ez eus kinniget un enrolladenn gant mouezh an aozer, don hag un tamm raouliet anezhi, plijus da glevet ha merket gant liv Kerne. A bouez-bras eo, rak evel-just e tenn ar gontadenn d'an hengoun dre gomz ; mont a reer tre a-drugarez da formulennoù ma vez kemennet krenn-ha-kraek e pella ar selaouer diouzh ar bed gwir ; tapet e vezer gant c'hoari arc'henganou, ar c'hlotennoù, ha gant troioù-lavar a son evel breoù. Aze e santer ur varzhoniezh dibar, peurgetket er gontadenn verr « An erv vili », a zo ur gwir vojenn ar Marv diouzh kostez Beg-ar-Raz, ha na glask ket kement-se kontañ un istor, met kentoc'h arvestiñ ouzh dremm dreistnaturel ar vro, ma vez santet e pep elfenn an aod hollvezañs an Anaon o klemm. Ha diouzh lusk ar gaoz e vez santet ar mor o tialaniñ, ar bili o ruilhal hag o tiruilhal, an eneoù o huanadiñ. Er c'hontadennoù all ivez, evit d'o lusk bezañ primoc'h ha d'o zon bezañ lirzhi-


noc'h, e vez taolet evezh da son ha red ar gaoz. Er gontadenn « Droch ken e hej ! » e vez ur seurt Yann leue o vont war gein ar gazeg Gavotenn, en ur zibunañ frazennoù desket dre 'n eñvor na vezont azasaet tamm ebet ouzh ar blegenn ; met e penn-kentañ an istor e vez deskrivet ar goañv kalet a zalee d'ar bloavezh-se, ken na gouezhe al laboused evel mein, ken na veze skornet ar rinier ha frailhet kef ar meurdezusañ gwez. Anken hag estrenvan eo a vez kavet neuze e digoradur an istor fentus-se, ha kaset e vezer gant ar gaoz a-dreuz un daolenn bras ha teñval, diskuilhet tamm-ha-tamm he munudoù skrijus – ar pezh a ziskouez ivez, pa soñjer mat, n'emañ ket pell bed ar marvailh diouzh ar bed gwir, ma kinnige bep bloaz ar yenijenn hag an naonegezh ren war ar vro. Santet e vez zoken, gwech ha gwechall, ez eus bet empentet marvailhoù da stourm a-enep ur vuhez ken garv, da leuskel pesketaerien baour da dapout ur pesk burzhudus ur wech an amzer.

Komprenet e vez gwelloc'h e vefe ar c'hontadennoù un afer barzhoniezh pa ouzer eo bet lakaet e penn-kentañ ar skrid un

arroudenn gant Rilke, « A-barzh skrivañ an disterañ gwerzenn », ar pezh a c'hell bezañ souezhus da gentañ. En destenn-se ez eus kaoz eus ar pasianted ret evit skrivañ ; dav eo bezañ bevet ha tostaet ouzh kevrenoù, ar bugel, al loened, ar c'hleñved, ar gwilioudiñ, ar marv ; dav eo kaout eñvorennoù bugaleaj ac'h a d'ober un teñzor amsklaer, gant fromoù don, anken ha levenez ; ha dav eo gortoz e teufe an eñvorennoù-se en-dro, en un doare ken reizh ha ken gwir ma 'z eont d'ober yezh ha mouezh an aozer. Evel-se e wel Yann Guillamot al labour war e gontadennoù : ul labour daskor diabarzh, evit klask, goustad, ar stumm a sono reizh, a zihuno skeudennoù ha fromoù, hag a vo dellezek eus an hengoun a zoug anezhañ, hag eus eñvorennoù deuet a-bell.

MB

**Geriadur ar Vezekniezh
Galleg-Saozneg-
Brezhoneg,
Rann 11,
Récepteur-Spectrine,
gant Guy Etienne ha
Yann-Baol an Noalleg.,
Preder,
pajennoù 1601-1889, 22€**



Kenderc'hel a ra Yann-Baol An Noalleg gant labour Guy Etienne, oc'h embann unnekvet rann *Geriadur ar Vezekniezh*. N'eo ket marv ar Geriadur gant an den en doa lakaet al labour skiantel-se war ar stern. Kaset e vo an erv da benn vat gant tud gouest da genderc'hel ha da dreuzkas labour o diaraogerien evit o warlerc'hidi. N'eo ket torret ar chadenn neuze. Ret mat eo goveliañ binvioù resis ha skiantel evit reiñ un dazont d'ar brezhoneg. Daoust hag-eñ e c'heller lavarout, evel ma lenner war gein al levr, ez eo « saveteet » ar brezhoneg a-drugarez d'al labour divent a zo bet sevenet war ar sevel gerioù ? N'on ket sur. Gant ar Vretoned an hini e vo saveteet hor yezh, da lavarout eo gant an ober sokial a vo graet anezhi. Gwir eo avat, n'hell ket an ober sokial bezañ efedus war hir

dermen ma chomer boud gant ar gerioù hon eus d'ober ganto er vuhez vodern. Trugarez, neuze, d'an holl re a ya da-heul ar Werelaouen hep koll kalon.

MbdB

Viktor, ar bugel gouez.
gant Marie-Hélène Delval,
Sacha Goerg,
brezhoneg gant Benead
Vernon ha Mark Kerrain,
Sav-Heol,
48 pajenn, 6€



Eus un istor gwir ez eus kont. Viktor, ar bugel gouez, a oa bet kavet dre zegouez en ur c'hoad e kreisteiz Bro-C'hall, daou c'hant vloaz zo. Heñvel ouzh ul loen e oa. Foutouillek e vlev, krammenek e groc'hen, hir ha kalet e ivinoù. Grognañ a rae e-lec'h komz. Dantañ ha skilfañ a rae evit en em zifenn. Daouzek vloaz e oa, pe se. Kontet e vez deomp penaos e voe degemeret gant ur mezeg hag e vatezh, tud karantezus anezho, hag a glas-kas deskiñ d'ar paotr lenn ha komz evel n'eus forzh peseurt bugel all. Met diskouez a ra Viktor bezañ gwall ziaes. Un hunvre kaer e oa ober ur bugel desket eus ur bugel gouez. Displeget en deus Gilbert Dalgalian penaos n'hell ket ur bugel adperc'hennañ ar galloud komz goude e seizh vloaz¹.

1 Gilbert Dalgalian, *Présent et avenir des langues, une question*

Araokadennoù bras a raio Viktor, met ne gomzo ket. Tonkadur ar bugel gouez-se a zlefe dedennañ kalz ar vugale.

Ar skrid-se a c'haller selaou war lec'hienn *Kuzul ar Brezhoneg*, war bajenn katalog *Sav-Heol* : www.brezhoneg.org.

MbdB

de civilisation, Lambert&Lucas,
2020, 232 bajenn.

**... 'gisti, tout !, Istor blev
ar Bretonezed,**
gant Erwan Hupel,
Al Liamm,
58 pajenn, 7€



Ganet eo bet al levr-mañ diwar ul labour Skol-veur a-zivout « Istor blev ar Bretonnez ». Furchet en deus Erwan Hupel e-barzh mammennoù liesseurt, lennet en doa kanaouennoù, rimadelloù, danevelloù darvoudoù, rentaoù-kont prosezioù. E berr gomzoù e kendalc’h gant e labour diwar-benn istor sokial Breizh, istor didrouz ar mennozhioù, istor buhez an dud ordinal, lakaet war-wel a-drugarez d’un elfenn resis, amañ blev ar merc’hed. Kerkent ha ma kroger gant an danvez fonnus-se e vez dibunet war un dro istor ar gevredigezh a-bezh, peurgetket hini ar gwask sokial ha relijiel a veze lakaet war ar maouezed. « Enor an dud eo a oa e blev ar merc’hed. » Istor an enor hag ar vezh, istor ar redi da vezañ direbech, istor al labour a-lazh-korf, istor

c’hoant ar baotred ha sujidigezh ar merc’hed, istor ar gerioù lemm hag ar spont rak an teodoù fall, hag evel-just istor an dienez, na laka ket an dud da gaout muioc’h a zamant an eil re d’ar re all : sed ar pezh a zo stag ouzh blev ar merc’hed, ha sed danvez al levr entanus-mañ.

Evitañ da ginnig ul labour enklask pizh n’eus ket bet choazet gant an aozer reiñ ur stumm skiantel d’e levr. Gant e zoare dibar da lakaat harzoù ar rummadoù lennegel da steuziañ e skriv an istor diouzh savboent ur plac’hig, a zo o klask en em ziluziañ gant hec’h istor dezhi hec’h-unan. Istor fromus ar c’horf ne c’hellfe ket marteze bezañ dibunet gant mouezh disebant ur skiantour ; neuze eo mouezh ar plac’hig a zasson el levr, da lâret eo mouezh ar gounnar. Brouezet-ruz eo Mar-

c'harid, ha greunenn a vir ouzh ar baotred, a sach war blev ar merc'hed, ouzh he zad dreist-holl, a laka reolennoù strizh da ren he buhez. Kement a imor a zo enni ma 'z a da welet ar bred-vezeg bep sizhun, hag an ortofonourez ouzhpenn, gak m'eo deuet da vezañ gant ar fulor. Diwar istor merc'hed he familh e skriv neuze istor ar blev, da ziskargañ ar pouez kounnar ha glac'har sammet war he chouk. Ha setu-hi oc'h atersañ, ha pa vefe en un diviz ijinet ganti, Chan, mamm-ioù he mamm-ioù ; Marc'harid, he mamm-ioù ; Mariann, he mamm-guñv ; Anna, he zintin... Hag ar c'homzoù ha difoupañ, traoù chomet rouestlet, fuilhet e spered ar plac'hig : feulster tanav, alioù fur ha skouerioù roet d'ar merc'hed, redi da wiskañ ar c'hoef (ha pa vefe tomm-gor an amzer), aon rak ar blev dispaket a laka da geñveriañ anezhe gant naered-gwiber. Evel ouzh un dachenn-vrezel e sell ar plac'hig ouzh an istor-se, ha gant an droukrañs a vag ouzh "lezenn ar baotred" e kemer perzh a-zevri er stourm, diouzh tu ar "sorsezed" hag ar "viltañsoù", gant ur seurt benelouriezh divoas ha skoemp.


From a vez degaset gant an istor kriz-se, gant an darvoudoù dister a lâr kalz : blev gwerzhnet evit ur mouchouer, ur vuntreze lamet he c'hoefoù diganti, rimadelloù goapaus diwar-benn merc'hed diskabell lakaet da strouilhenned. A-ratozh avat e seblant ar gaoz bezañ ken digempenn ha spered strafuilhet ar plac'hig ; ha keuz a c'hell dont d'al lenner a-wechoù, pa sant n'en dez ket komprenet penn-da-benn nag an danvez, na penaos eo ret intentiñ anezhañ. Rak mont a ra an aozer diwar hanter c'her, pell diouzh ur stil skiantel a droc'hfe ar skrid gant notennoù, daveoù, lec'hioù ha deiziadoù ; ne ginnig ket arroudennoù da gentañ, da zielfennañ anezhe da-c'houde ; intret eo ar gaoz hec'h-unan gant pozioù, troioù-lavar, damvenegoù a bep seurt, na vezont na displeget, na merket gant daouaskoù. Gant-se e teu da steuziañ an harzoù etre ar gaoz hag an danvez, ar pezh a c'hell lakaat al lenner da vezañ divarc'het ; met ar stil dreist-holl a zeu buhez ennañ dre ma vez maget gant komzoù poblek, ha ma tremen blim eus ar werz d'ar rimadell. En ur guzhat a-dreñv mouezh kounnar ur plac'hig e kendalc'h Erwan Hupel gant ar

rummad lennegel dibar en deus
ijinet, hag e stumm ur romant e
teu a-benn da gontañ war un dro
istor esmaeüs ur plac'h o klask
war-lerc'h mammenn he gla-

c'har, hag istor Mab-den, skoa-
chet er gizioù, er munudoù hag
er c'hanaouennoù.

MB

Tri devezh,
gant Petros Markaris,
brezhoneg gant Alan Botrel,
An Alarc'h Embannurioù,
76 pajenn, 7€




Ur misi adkavout skridoù
Markaris ! N'eus ket anv eus ur
romant polis ar wech-mañ, ha
c'hoazh... Ar marv ha paotred
Mari Robin o deus ur pouez
bras en istor-mañ. Savet eo bet
diwar un darvoud istorel, er
bloavezhioù hanter-kant. Tri
devezh e pad an trubuilhoù. Tri
devezh kalet evit kumuniezh ar
C'hresianed e Turkia. Ur vom-
bezenn zo bet lakaet da darzhañ
e ti genidik Ataturk, marc'h-
blein Turkia, ha taolet an diskred
hag ar bec'h war ar C'hresianed.
Un apoue vat evit dazalbadiñ
tiez ha stalioù izili ar gumuniezh
estren-se. Un daolenn sokial
bev birvidik a vez livet gant

Markaris. Kompren a reer gwel-
loc'h moarvat, ha diouzh an
diabarzh, petra a c'hell bezañ an
estrengasoni. Ur gemennadenn,
ma n'eo ket ur gentel, e-keñver
ar mennozhioù flacius a zo
oc'h en em ledañ en Europa
a-bezh er mare-mañ.

MbdB

War an aod vev,
gant Davy Jaouen,
An Alarc'h Embannadurioù,
22 bajenn, 5€




War an aod vev ez a da bourmen Melen, ur paotrig tro c'hwec'h vloaz, gant e dad-kozh, Fañch. Ur gentel natur eeun ha dudius eo, skeudennaouet gant dourlivadurioù dous. Ar bronnoù-mor, ar brennig hag ar c'hranked a zo livet kaer. War an aod en do Melen digarez da

amprouiñ meur a skiant : ar c'hwesda, ar blazañ, ar gweled ha skiant an touch... Ur bourmenadennig bedagogel neuze, da vezañ lennet a-raok pe goude mont d'an aod gant ur bugel, adalek pemp bloaz.

MbdB

**Le Reliquaire du
Roi Salomon,**
gant Bernard Morin,
Yoran embanner,
169 pajenn, 10€



Seitekvet romant an dastumadenn *Polar* kinniget gant Yoran eo *Le reliquaire du Roi Salomon* ma kredan al listenn a gaver e penn kentañ al levr. Un darn eus ar romantoù-se zo bet meneget el *Liamm*. Goût 'oar eta hol lennerien ez eo dizingal-


tre ar rummad. N'emañ ket *Le reliquaire du Roi Salomon* e-touez ar re wellañ... N'eo ket gwall dedennus an enklask evit adkavout ar relegouer bet profet da Salaün gant Charlez Voal ha kavout piv en deus lazhet un ofisour eus e lez. Eeunik an

istor, eeunik ar stil... Un tamm c'hwezh ar c'hozh gant an oberenn. Perak neuze komz diwar he fenn ? Evit un abeg : ral eo ar romantoù "polis" a daolenn ar prantad-se eus istor Breizh, mat eo e vefe unan daoust ma n'eo ket gwall vat. Alies e soñjan e vefe tu d'ober

ur stirad filmoù awenet gant mareoù zo eus istor hon bro. An istorig-mañ a ziskouez, en ur stumm, e vefe danvez e buhez Nevenoe, Erispoe, Salaün ha re all evit sevel traoù a-feson. gant ma vefe kavet tud varrek hag arc'hant evit en ober...

HL

**Petite histoire des rois,
ducs et duchesses de
Bretagne,**
gant Etienne Gasche,
Yoran embanner,
270 pajenn, 9€



Eil embannadur un oberenn bet embannet e 2006 eo al levr-mañ. Adwelet ha kresket eo bet. Sklaer eo an titl. Gouestlet eo al levr da vuhez renerien Vreizh adalek Nevenoe betek an Dugez Anna hag he diskennidi. Un dra a bouez eo daoust ma n'eo ket an doare nemetañ da welet an istor evel ma lavar Jean-Jacques Monnier en e rakskrid. Studial ar gevredigezh, an ekonomiezh, ar sevenadur zo pouezus-kenañ ivez. An div dachenn a gloka an eil eben.

Kavout a reer ur pennad, berr-tre alies, a-zivout pep roue, dug pe dugez. Ar fed ez eo berr ar pennadoù a vir evel-just da vont don e buhez pep hini. Ha gellout a reer chom gant e c'hoant aliesik. E fin al levr ez eus un toullad pennadoù diwar-benn tud zo (Eleanora Akitania, Loeiz XI a Vro-C'hall...) pe darvoudoù zo (an arigrap bet lakaet gant ar Vikinged war Naoned e 843, Emgann an Tregont), ul levr-lennadur, roll an dud bet meneget, hag ur

gerig ouzhpenn gant Yoran an embanner.

Hegazet on bet meur a wech gant mankoù iskis a ziskouez n'eo ket bet adlennet mat an destenn. Gellout a ra bezañ touellus evit al lenner. Ur skouer : p.74, ne 'm eus komprenet netra el liammoù etre bugale Budig, kont Naoned, Judith ha Mathias pa lenner e traoñ ar bajenn : « Judith de Nantes, tante du duc Mathias ». Kaer em eus bet klask ne 'm eus kavet dug Mathias ebet. Breur ha c'hoar pe moereb ha niz ?

Grevusoc' h, p.194, a-zivout skrid-embann Plessis-Macé e 1532, e lenner « [...] mais qui fait passer la Bretagne sous la responsabilité de la famille royale, le dauphin Henri demeurant duc de Bretagne ». Met, p.240, « François le Dauphin, fils de François premier et de la reine Claude, mort en 1536... ». Daou zaofin d'ar memes mare ?


Lenn a reer war Wikipedia (brezhonek ha gallek) e voe kurunennet Frañsez dug a Vreizh (Frañsez III) d'ar 14 a viz Eost 1532 e Roazhon. Tostoc'h ouzh ar wirionez a soñj din.

Un dra fentus evit echuiñ : p.143 e veneger oberenn Jean-Pierre Leguay ha Hervé Martin diwar-benn Breizh da vare an duged gant an titl : *Fastes et malheurs de la Bretagne rurale*. Souezhus neketa.

Embannet eo bet un tamm re vuan al levr kazi sur. Dipitet on bet gant ar skeudennaouiñ ouzhpenn.

Reiñ a ra koulskoude an oberenn un tañva prizius eus istor Breizh da vare ar rouaned, duged ha dugezad. Ret eo, rak mantrus eo live gouiziegezh ar Vretoned war dachenn o istor. Gant ma roio c'hoant d'al lennerien da vont pelloc'h.

HL



Riwal HUON
Tudyal HUON

bev an anvioù brezhonek bev-
mat er vro. Un toullad levrioù
en deus skrivet (*Moutig* evit ar
vugale da skouer) ha kroget eo
gant ur saga : *Saga Arvorika*.

Daou bennad all disheñvel mat a ginner d'al lenner brezhoniger. En Israel, ar Yuzevien a fell dezho e kreskfe an trevadennoù e Sisjordania a vez skoazellet gant luskadoù avielourien kristen.

Kuzul-kêr Roazhon a-enep
ar 5G evit poent. Setu aze
danvez pennad Nil Caouissin.
Levezon ar re C'hlas hag UDB
a zo kresket un tamm mat nevez
zo.

Pevar levr a zo bet burutellet gant Herve Latimier : *Ouzh red an amzer* gant Paol ar Meur, *Emgann evit an tan* gant Goul-

> **Pobl Vreizh (682)**

Paol ar Meur a lak ar gaoz war ar skrivagner Louis Hémon, ganet e Brest e 1880 ha tapet brud gantañ e Kebek gant e levr *Maria Chapedelaine*.

Lenn a c'heller ivez ur pennad-kaoz gant Yann-Bêr Kemener aterset gant Paolig Kombot. Gant ar gevredigezh *Eost* en doa stourmet garv ouzh maer Terrug evit ma chomfe

c'han Kervella ; *Ar valafenn
hag ar Roue* gant Marie Zepf ha
Shona Shirley Mc Donald ; ha
Tri devezh gant Petros Markaris.

Morgan Tremel en deus
savet ur rentañ-kont eus nive-
renn 442 *Al Liamm*.

El lodenn c'hallek e c'heller
lenn ur pennad gant Alain
Kervern diwar-benn an Haiku e
brezhoneg.

Kinnig a ra en e bennad un
haiku gant Fañch Peru :

e miz Here

e vez gwalc'het an oabl

div wech bemdez

hag unan all gant Anjela
Duval :

*War al leton touzhet berr
pemp dred o klask o boued
ur c'harr-tan er c'horn-tro*

> Pobl Vreizh (683)

Ar pennad kentañ a c'heller
lenn el lodenn vrezhonek a zo ur
pennad-kaoz gant Tangi Ker-
marrec, kelaouenner e Pariz
(France Télévision). Harzet e oa
bet e Pariz da-geñver ur vani-
festadeg dirak ministrerezh an
Endro. Sammet e oa bet gant 28
den all en ur c'harr-polis,
bac'het e-pad un nozvezh ha
laosket da vont goude bezañ bet
goulennataet ha tapet roudoù e



vizied. Ouzhpenn ugent vloaz
zo ne oa ket bet harzet ur c'hela-
ouenner eus France Télévision.

Pennad Paol ar Meur a lak ar
gaoz war an dizemglev bras o
ren war an dachenn politikel er
Stadoù-Unanet. Ar biologour ha
geografour amerikan Jared
Diamond a zispleg e soñj war ar
blegenn arvarus emañ ar gevre-
digezh amerikan enni. Implij ar
skrammoù elektronek eo penna-
beg an emdroadur-se. Kement
amerikan a c'hell dibab e log
kelaouiñ ha koll a ra ar boaz da
glevet displegadennoù tud dis-
heñvel o soñj diouzh e hini. Ne
vezont ket lakaet da brederiañ
ken. Kalz amzer a dremen an
amerikaned dirak o skrammoù
diwar goust an darempredoù
keodedel. Dek eurvezh eus o

amzer dihun a dremenont dirak o skramm. Ar benveg kelaouiñ nemetañ eo bremañ.

Emañ Amazon o klask en em staliañ e Brieg. Maer kozh Kemper D. Jolivet, en doa sinet gwerzh an dachenn just a-raok an dilennadegoù. Maerez nevez Kemper, Isabelle Assih, ha maer Brieg Thomas Ferec a zo tapet berr bremañ hag int o-daou a-enep krenn ramz ar c'hoñvers enlinenn.


Ar pennad « Sifroù pesketaus » a zo bet skrivet gant Maxime Touzé. Un hengoun a-gozh eo skrivañ anv ar vag

pesketa gant sifroù ha lizherennoù pesketaus (sifroù dezho stumm un higenn da skouer).

Herve Latimier en deus burutellet seizh levr nevez embannet : *Ar gêr vurzhudus*, danevell varzhus ar Vretoned gant Yeun ar Gow, *Ar c'hlasker-aour ha danevelloù all* gant Loeiz Gwilhou, *Moutig hag arc'h Noe*, *Lili, da gousket !*, *Al labous hag ar pezh aour*, *Viktor ar bugel gouez* ha *War an aod vev*.

TH

> Bro Nevez (156)



Kaoz a zo eus ul load a ra berzh war a hañval : NHU (evit “ni hon-unan”), aozet evit ar

saoznegerien a oar galleg hag int-i dedennet gant Breizh. Lois Kuter a lak ar gaoz ivez war gelaouenn ar *Celtic League* : *Carn* ; al load *breizh-america* hag *emoji Breizh* nac’het gant Unicode.

Ur pennad a zo ivez diwar-benn *Keit vimp Bev* ha levr nevez G. Kervella embannet gant *Aber* : *Karantez-digaran-tez*, un dastumad 12 danevell. Anv zo ivez eus ar *Geriaoueg-vor teiryezhek* aozet gant Marsel Modir.

Daou levr e galleg a zo meneget ivez : *Bretagne, l’essentiel* gant J.-J. Monnier ha

Kenavo gant Maiwenn Raynaudon-Kerzhero.

Gant Jean-Pierre Le Mat ez eus kaoz e saozneg eus ar c'hwesha (*smells*) en e bennad *Deep inside a breton skull* (niv. 65).


Lois Kuter a zo bet o klask e-barzh *Dictionnaire des romanciers de Bretagne* gant Bernez ha Jacqueline an Nail buhezskrid tri skrivagner hag o doa bet en o amzer liammoù

gant Amerika : Joseph Brelivet, Mael de Brescia ha Geneviève Mehérenc de Saint-Pierre.

An diell an dro-mañ a zo bet kemeret en ul levr skrivet e 1910 gant George Wharton, Edward : *Brittany and the bretons*. Kontañ a ra e droiad e Kastellin, er Menez Are, e Douarnenez, e Beg ar Raz hag e Kemper.

TH

> Hor Yezh (303)



Diazezet eo studiadenenn Clément Guillanton e niverenn 303 **Hor Yezh** war dezenn Eva Guillorel : *La complainte et la plainte*. « Afer ar merc'hed eo al

lazhañ bugale : kanet e vez ar gwerzioù gant merc'hed dreist-holl. » Gant merc'hed e vez kontet ivez penaos eo c'hoar-vezet ar gwallleur. Setu m'eo pinvidik ar pezh a c'haller deskiñ er c'hanaouennoù a-fet kevredigezh ha doareoù bevañ an amzer dremenet.

Fiziet e oa bet e Daniel Doujet paperoù Job Jaffre, hag asambles gante lizhiri an eil d'egile, Adskrivet en deus Daniel Doujet anezho evit lennerien ar gelaouenn.

Ar studiadenenn pennañ (p.25), diwar-zorn Pierre-Yves Kersulec zo savet diwar-benn gwerz Loeiz Ar Ravalleg. Ur renabl a ra eus 35 stumm ar werz, « chomet diembann betek-henn

ar bras anezho ». Un eil lodenn ganaouenn e-keñver yezh ha
a vo, enni e vo kaoz eus danevell gwerzaouriezh.
ar werz ha perzhioù ar *RH*

**Annaig KERVELLA &
Tudual HUON**

**Annaig KERVELLA &
Tudual HUON**

HOR MIGNONED _____

Ganedigezh :

Laouen eo Maripol Gouret ha Jean-François Guillouezic o
kemenn deoc'h ganedigezh o merc'hed-bihan :

Lupita Anjela d'ar 26 a viz C'hwevrer 2020, e Naoned, e ti Tifenn Merien ha Brendan Guillouziec-Gouret ha Lilwenn Soukaina Zita d'an 22 a viz Here 2020, e Roazhon, e ti Aziliz Guillouziec-Gouret ha Raemy Errabia.

Kaňv :

Aet eo Herri Gourmelen da Anaon d'ar 5 a viz Du. Skoet eo bet skipailh *Al liamm* gant ar c'heloù. Ober a ra da familh Herri ha d'e vignoned e wellañ gourc'hemennoù a gengañv.

Emezellet abred en UDB, eo bet Herri ur stourmer dibar ha pell amzer skeudenn ar strollad evit an diavaez. Ezel eus ar Burev politikel e-pad bloavezhioù, mouezh aotreet ar strollad, kuzulier-kêr Sant-Maloù e-pad 25 bloaz, bet div wech kuzulier Rannvro...

Kalz kemennoù ha pennadoù o deus diskouezet ar plas pouezus en doa bet e bed politikel Breizh. Alies e kaver meneg eus e vouezh kreñv e pep keñver : klevet e veze mat ha sklaer ha poellek e veze e gomzoù a stourmer.

Ar ger a zeu din pa soñjan ennañ eo “kamaradiaj”. Kavout a raen ar ger-se e fin al lizheroù a gase din a-vare-da-vare. Ur ger a lavar mignoniezh, kengred, eskemmoù evit ur pal boutin.

Evel an holl e vezen fromet pa gane ar Vro-Gozh. Klevet em eus anezhañ o kanañ an Etrebroadel ivez. Evitañ n’helle ket Breizh bezañ digabestr en diavaez eus ur bed ma kerzhe unanet ar pobloù skoaz-ouzh-skoaz.

Kenavo dit, kamalad. Ra vo gwenn da ved.

HL

Keloù hon eus bet e oa aet da Anaon Gwenola ar Beg, c’hoar Anna ar Beg hag Herve ar Beg.

Gwenola zo bet difazierez evit *Skol Ober* e-pad pell amzer.

Aet eo da Anaon Marie-Rose Koadou, mamm Herve Bihan, rener ar gelaouenn *Hor Yezh* ha kelenner e Kevrenn Geltiek Roazhon 2.

Skipailh *Al Liamm* a zo mantret o kemenn eo aet da Anaon Maina Kernallegenn, merc’h Daniel Kernallegenn hag Anna-Vari Diaskorn, c’hoar Tudi, Mael ha Nonna.

Ganet ’oa bet d’an 01/07/1980. E Diwan e oa bet skoliataet, e Kemper ha da c’houde er Releg evit prantad ar skolaj hag al lise.

Un arzourez e oa, troet kenañ war an tresañ hag al liveañ, ar graferezh. Hec’h oberennoù a zo bet gwelet e-kerzh diskouezadegoù un tammig e pep lec’h ha dreist-holl e Douarnenez ha Naoned. Kenlabouret he doa bet kalz gant *Kermarron*, un ti kengred e Douarnenez just a-walc’h. Roet he doa bet buhez da atelieroù arz e MJC Douarnenez hag e Ti an Holl e Kerfeunteun-Kemper. Ganti e oa bet savet golo *Dre ar prenestr*, un dastumad danevelloù gant Goulc’han Kervella bet embannet ganeomp e 2006.

Taget gant ur c’hleñved kriz e oa abaoe un toullad mizioù. Lezel a ra war he lerc’h ur verc’hig, Anjela.

Obidoù Maina a zo bet lidet e Kemper d’ar 25 a viz Du.

D’he ziegezh, d’he mignoned e kinnigomp a-greiz kalon hor gourc’hemennnoù a gengañv.

Ra vo gwenn he bed.

Miz Gwengolo : Pierig AN DIGERC'HER ; Loic CAMPION ;
Pêr DREZEN ; Daniel CARRE ; Jacques VINCENT ; Goulven
DONVAL ; Gilbert KEROUANTON ; Glaodig LIABEUF-LE
MAGUER ; Per LAVANANT ; Armel LE SEC'H

— War un dro : 204,20€

Miz Here : Thierry MADEC ; Padrig AN HABASK ; Serge
AUBIN ; Jeannot FLAGEUL ; Robert PERROUD ; Mari-Soaz AR
C'HOZH ; Gwenael BARON ; Tremeur GUILLAUMIE ; Yann-
Loeiz KABELL ; Alain BOUVET

— War un dro : 160€

Miz Du : Eric CHEVALLIER ; Gwenael EMELYANOFF ;
Robert GOUZIEN ; Fañch JESTIN ; Pêr LEMOINE ; Hervé
RENAN ; Lan TANGI ; Jakez MEREL ; Bernez TANGI ; Jean
CLOAREC ; Jean OLLIVRO ; Jean-Claude MORVAN

— War un dro : 310€

*Mil drugarez a lavaromp ur wech ouzhpenn
d'hor skoazellerien.*

AR C'HOVID PE AR GOVID ?

Souezhet eo bet skipailh *Al Liamm* o klevet brezhonegerien o
lâret “ar Govid” e-lec'h “ar c’hovid”. N’emaomp ket e-touez azeu-
lerien an *Académie française* a zo divarrek e-keñver brezhoneg nag
eus ar rummad tud a soñj n’hell ket un dra spontus ha fallakr kaout
un anv gourel evel ar c’helc’hwidennou n’eus ket pell c’hoazh.

Goulennet hon eus ali *Ofis Publik ar Brezhoneg*. Setu ar respont
hon eus bet :

« Da gentañ e c’haller merzout n’eo ket gwall stabil jener ar ger
“Covid” e galleg : daoust da erbedadennoù an Akademiezh c’hall

evit lavaret “*la Covid*” e klever – hag e lenner zoken – “*le Covid*” alies a-walc’h.

Ma c’haller kompren arguzennoù an Akademiezh c’hall evit ar galleg ne welomp abeg ebet evit erbediñ “ar govid” e brezhoneg.

E TermOfis e kinnigomp abaoe an hañv-mañ :

maladie à coronavirus 2019 (Covid-19) | kleñved ar c’horonavirus 2019 (Covid-19) | g.

Evel ger gourel neuze. Ha setu ar pezh hor boa respontet da c’houlennerien zo e miz Ebrel dija :

“Covid-19” n’eo nemet teskanv – pe gwreskanv kentoc’h – “Coronavirus disease 2019” d.l.e. *maladie à coronavirus 2019* e galleg ha “kleñved ar c’horonavirus” e brezhoneg (pe “kleñved ar c’hurunviruz 2019” er *Wikipedia brezhonek* : <https://br.wikipedia.org/wiki/COVID-19>). Gourel ar ger “virus”, gourel ar ger “koronavirus” neuze, ha gourel ar ger “kleñved”. Ne welan abeg ebet evit lakaat “Covid-19” da c’her benel neuze. »

Ma sentfe tud an *Académie française* ouzh o reolenn e tlefent aliañ lâret “la Mcovi 19”. Ne reont ket... Iskis neketa. E brezhoneg e vefe “ar C’hovid 19” ma vefe heuliet memes reolenn. Ne reer ket...

Kendalc’homp gant “ar c’hovid” eta.

TESTENIOÙ OFISIEL DIVYEZHEK EVIT MONT-HA-DONT _____

Bac’het omp adarre evit an eilvet gwezh en abeg da gleñved ar C’hovid. Ofis Publik ar Brezhoneg en deus savet testenioù dile-c’hiañ disdalc’hus brezhoneg/galleg ha reoù all gallaoueg/galleg. Un doare da vrezhonekaat hor buhez pemdeziek.

<http://www.brezhoneg.bzh/218-furmskridou-ha-testennou-ofisiel-divyezhek.htm>

ERRATA « KAOUR AR BARZH, GALEOUR » _____

Un toullad fazioù ha diakedoù a zo en em silet en destenn (abalamour d'ar pres e vefe embannet evit saloñs Karaez ? En abeg d'ar c'hovid-19 ?). Ra vo madelezhus Katell Lennerez ha Yann Lennar e-keñver ar skrivagner hag an embanner.

pajenn, linenn	e-lec'h	lennit
11, 29	E dad	An Aotrou Helouri a Dreveur
30, 7	da gav	ho kav
30, 8	e oas	e oac'h
30, 13	e lojez ez leti	e lojit en ho leti
30, 16	Pa'z out-te	Pa'z oc'h-chwi
38, 15	e zitourerien	titourerien
38, 25	na ganit	na ganot
65, 3	en ur kas	en ur gas
69, 26	ranaveller	ravaneller
74, 4	reuzeudeien	reueudien
76, 14	Louis Barazer	François Barazer
79, 18	e kavi	e kavot
79, 19	reuzeudeien	reueudien
82, 12	Ma, Louis, te...	Ma, François, te...
84, 29	a plede	a blede
85, 28	hag gant	ha gant
86, 3	Louis	François
88, 1	Louis	François
89, 11	Louis	François
90, 28	dit	deoc'h
90, 31	dek bloaz	dek vloaz
91, 15	dit	deoc'h
91, 17	e c'hellfes	e c'hellfec'h
91, 23	ac'h eus	hoc'h eus
91, 24	ne rafes ket evit da	ne rafec'h ket evit
	vab-te	ho mab-c'hwi
92, 10	en ur afer	en un afer
94, 8	Louis	François
92, 12	savetin	saveteiñ

92, 13	ne saveteiñ	ne savetein
108, 12	ginnnige	ginnige
111, 17	-Hag eñ	Lemel an tired
113, 5	roud bet	roud ebet
134, 15	Soazon	Saozon
148, 27	Sourjezit	Skourjezit
150, 22	n'hoc'h eus diskuliet	n'hoc'h eus ket diskuliet
11, 30	he merc'h	e verc'h
16, 23	neouañs	noueañs
153, 22	Louis barazer	Louis Barazer
176, 18	Ha ho	Hag ho
177, 28	vataras	vataraz
178, 10, 19, 25	Louis	François
179, 25	hol lodenn	ho lodenn
181, 11	a didourer	a ditourer
181, 16	Daou ditour	Div ditour
186, 11	dezho ?	dezho.
195, 19	un jeneral	ur jeneral
214, 19	ober bez pikol	ober ar veaj pikol
214, 21	diouzh ar bed	diouzh an heol
218, 9	kloazadur	klozadur
220, 29	e Paris	e paris
227, 24	Ur banne chistr ? Melar.	Ur banne chistr, Melar ?
229, 10	ar Gward broadel	ar gward broadel
229, 17	trouz an tenn	an trouz

KARTENNOÙ BRAV

Mare an hetoù a dosta fonnus. Kartennoù brav a ginnig Al Liamm gant bommoù bet savet gant Maodez Glanndour, barzh ha skrivagner. Pemp a zo.

Priz : 1€ an tamm pe 4€ ar 5 + mizoù-kas (0.95€)

*Da c'houlenn digant : Al Liamm - Tachenn Volta 2 - 1 straed
Ampère - 22300 LANNUON*

sekretourva@alliamm.bzh

plg : 02.96.48.03.00

SELAOU OUZH ABADENNOÙ

P'emeur kraouiet er gêr e c'heller kaout un tammig amzer. Kit d'ober un droig war lec'hienn *Al Liamm*. Un toullad abadennoù a c'hellit kavout ha selaou. Atersadennoù tud ha lennadennoù. Ur splujadenn e bed al lennegezh. An abadennoù-se a zo bet kaset da benn gant radioioù evel Radio Kerne, Radio Kreiz Breizh, RCF...

<https://alliamm.bzh>

DEIZIATAER 2021 SKOL AN EMSAV

Un doare aes ha plijus da verkañ ar pezh a rit a-hed an devezhioù. Ha chom hep c'hwitañ pe ankoueout ar pezh peus d'ober.

12€ an tamm.

E gwerzh e stalioù-levrioù zo hag e Skol an Emsav - 8 trolec'h Sant-Albin - 35000 Roazhon

degemer@skolanemsav.bzh

plg : 02.99.38.75.83

DEIZIADUR 2021 DIWAN

Barzhoniel hag arouezel eo deiziadur 2021 Diwan ar wech-mañ. Savet eo bet gant Skol ar Faou.

Danvez ar plant hag ar boued eo a vez kinniget ar wech-mañ. Natur ha sevenadur. Kizidik ha kaer eo an hollad a-drugarez da skeudennerezh Aurore Colliou ha graferezh Romain Diguët.

10€ an tamm – Kavet e vez en holl skolioù pe e Diwan ZA Sant-Ernel - BP 147 - 29411 Lenderne Cedex.

RENEREZH NEVEZ E DIWAN

E miz Gwengolo 2020 'oa bet lidet kenavo Anna-Vari Chapalain da renerezh Diwan. E 2001 he oa bet anvet renerez ar rouedad. Labour e-leizh e-pad 20 vloaz. Met ne gavo ket hir hec'h amzer rak dilennet eo bet e ti-kêr Kemper ar bloaz-mañ. Un doare all da labourat evit ar brezhoneg hag ar vro.

Gregor Mazo, brezhoneger ha tad daou vugel skoliataet e Diwan a zo bremañ e-karg renerezh Diwan. Ra vleunio ar skolioù ha kalon dezhañ da vont war-raok gant ur garg ken pouezus.

TEULFILM : MANER LAOU

Setu ur pennad brav zo, er bloavezhioù 2000, e oa bet savet un heuliad teulfilmoù e brezhoneg diwar-benn skrivagnerien ha skignet gant France3. Kavet e vezont da bellgargañ ha da brenañ en INA. Abaoe n'hon eus ket bet tro da welet kalz teulfilmoù diwar-benn ar re a skriv hirie an deiz.

Un emgav gant Annie Coz eo *Maner Laou*, anv ur c'harter e Ploneour-Lanwern. Anavezet eo hirie dre ma skriv. Meur a levr deus bet embannet e ti *Skol Vreizh*, *Al Liamm*... Kontañ a ra penaos eo bet savet e brezhoneg ha perak he deus dilezet ha skarzhet he yezh-vamm da c'houde. Hag adkavet yezh he zud kalz diwezhatoc'h. Bremañ eo plaen an traoù en he c'hreiz. Peadra zo d'ar seller deskiñ stad an traoù e Breizh d'ur mare zo pa veze dismegañset kriz ar vrezhonegerien, penaos veze mezhekaet ur bern re yaouank ha bountet anezho da zinac'h o zud hag o orin. Heuliañ a reer Annie Coz war roudoù he bugaleaj, er Vro-Vigoudenn.

Maner Laou a zo bet skignet d'ar Sadorn 14 a viz Du, ar bloaz-mañ, en abadenn *Bali Breizh* war France3 Breizh. Sevenet gant Mai Lincoln. Kenbroduet gant *Kalanna*, *F3 Breizh*, *Tébéo*, *Tébésud*, *TVR*, *Brezhoweb*. Da sellet hag adsellet war lec'hienn *Bali Breizh* pe *youtube.com*.

LA SEMAENE AO FRERE ARTURO

Divinet ho peus ? Ya, *Sizhun ar breur Arturo* a c'heller lenn e gallaoueg abaoe an hañv-mañ. Istor Youenn Drezen a zo bet troet gant Patrik Deriano, hag embannet gant ar gevredigezh *Olepei*.

Evit gouzout hiroc'h : www.olepei.com

KATALOG NEDELEG KUZUL AR BREZHONEG

Evel bep bloaz e vez kinniget gant *Kuzul ar Brezhoneg* Katalog Nedeleg da dalvezout betek dibenn miz Genver. Ennañ, ouzhpenn al levrioù nevez deuet er-maez e-pad ar bloaz e ti embannerien KAB, e kaver ivez un dibab levrioù d'ur priz izel, dreist-holl evit ar vugale.

Evit gouzout hiroc'h e c'heller mont e darempred gant KAB dre bostel pe dre bellgomz :

kab@brezhoneg.org

pgz : 02.96.48.03.00

ha gwelet ar c'hatalog war lec'hienn KAB :

www.brezhoneg.org/br/blog/katalog-nedeleg-2020